

KANTIK
SANT SEBASTIAN

8N2-4-057
Saint-Ségall
chapelle St Sébastien

1

O Sant Sebastian, maro evit ar Feiz,
Prijit selaou peden ar bobl demeurez ar Vreiz;
E parrez Sant-Ségall, lec'h ma ho relegou,
Hor mirit deuz ar c'hlenvejou.

2

Azalek goulou deiz, beteg ann noz sarret,
Azalek ar c'huz eal, beteg ma ve savet,
Bep heur hag bep paouez, pa z'omp e lec'h et c'hoaz
Hor c'hendalo'hit krenv ha dinoaz.

3

Diouallit ac'han-homp, Merzer ken gallouduz,
Ha pellait diouz-homp ar c'hlevet ken euzuz,
Ar c'hlevet a zistruj hep truez na remet:
Ar vogen e z'eo hanvet!

4

Prijit-ta hon difen, ni hag hor mignounet
Deuz an oll guall-heuriou ha deus eur seurt klenvet,
Ni, pere a amzao oc'h Jezuz hag he vam
Koulz hag ouz-oc'h, n'omp ket divlam.

5

C'hui, Merzer, dre moc'h bet maguet e ker Milan,
A gassaz deuz ar vro eur vosen vraz, buan;
Hag a hellaz otten ive digan Doue,
Na zistroje ken er vro-ze.

6

Zoe, eur vaouez vud, hoc'h euz c'hoaz pareet
Ha d'he goaz, Nicostrat, ar lec'h et hoc'h euz rentet;
Kement-se, hoc'h eus gret dre eur burzud ker braz
Ma ze'an oll souezet c'hoaz.

7

Pa voa tud a feiz krenv, Guechall o c'houzanvi,
C'hui a roe d'he nerz enn ho merzerenti,
En eur voaranti d'e eur vuhez peur-baduz
Hag eur gurunen lugernuz.

8

O Sant Sebastian, Merzer leun a verit!
Keit ma vimp e buez, gane'omp ato chomit;
D'ann drindet ha d'hor Mam, ar Verc'hez benniget,
Hor rekommandit oll bepret.

9

Diouallit, parait, ha chenchit ac'han-homp.
Kendalo'hit evit mad, ar vosen pell diouz-homp.
Vit ma c'hellimp e peoc'h, meuli e pep amzer
Tad ar verzerien, hor Zalver.

10

Ha pa zeui Jezuz hor barner d'hor gervel,
Pa vo sonet ann heur ma vo red deomp mervel,
Obtenit m'hon d'o perz e gloar ar verzerien,
Ma velimp Doue da viken.

11

C'hui a vel enn envou, e t'ouez ann oll Elé,
Kaourintin, hor patron, he vignoun Guenole,
Ho fedit evid homp, hag ivez ar zent all,
Ma teuo Doue d'hon dioual.

12

Dre ho pedennou mad, ha graz hor Redemptor
Tennit ann anaoun euz tann ar purgator:
Grit ho lemel a boan, vit ma zaint d'hor gortoz
Enn eurusted ar baradoz.

Evel-se bezet great

